

KIS-484 – Gl. *affinité*, *affine* e lavar ar Jedoniezh.

(YBAN da GE – 03 02 96)

Er Jedoniezh e komzer eus Gl. *application affine*, *espace affine*, *fonction affine*, *groupe affine* hag ivez eus *affinité*.

War a hañval ez eo Leonhard EULER (1707-1783) an hini en deus graet anv evit ar wech kentañ eus treuzfurmadurioù mentoniel o virout ar gensturiegzh hep mirout ar pellder. Treuzfurmed ul lun zo ul lun “ kar ” neuze, e kerentiegzh gantañ (kv. La. *affinitas*, *adfinitas* "amezegiezh ; kerentiegzh dre zimeziñ" ; ivez a-zivout an traoù, sk. : *litterarum adfinitas* "kerentiegzh kenetre lizherennoù"). E brezhoneg hon eus *kerentiegzh*, *nesañvded*, *heñvelder*. EULER a verzh ivez e c'haller studiañ ar perzhioù anargemmat (Gl. *propriétés invariantes*) evit pep rizh treuzfurmadur. MÖBIUS (1790-1868) da heul a resisa keal an Al. *Verwandschaft* (Gl. *affinité géométrique*) evit deskrivañ ar rizoù ketep a dreuzfurmadurioù. Felix KLEIN (1848-1925), en e Raktres Erlangen, a glaskas rummata ar mentoniezhoù diwar savboent an treuzfurmadurioù. Meizad an treuzfurmadur, er Ventoniezh, a dalvez da gantañ ur c'henglotadur etre elfennoù un teskad poentoù hag elfennoù un teskad poentoù all hag a-geveskemm — gant Henhellaziz endeo edo ar mennoz desavelañ kenglotadurioù etre lunioù. PONCELET (1788-1867) a voe an hini kentañ o veizañ spis arver un treuzfurmadur da savelañ perzhioù ul lun hollek diwar berzhioù ul lun dibarek. An treuzfurmadur diazez arveret gantañ eo ar bannadur diwar ur poent kreiz eus ur blaenenn d'unan all. Ar savboent dezrannel dedalvezet gant jedoniourion 'zo (MÖBIUS, PLÜCKER) en deus kevaraezet reiñ ur furm riñvoniell d'an treuzfurmadurioù-se hag alese digej ar perzhioù, an anargemmadoù pergen. E se e c'hoarvezas ur c'henstruj etre Mentoniezh ha Riñvoniezh, hogen n'eo nemet adalek ar mare ma voe desellet an treuzfurmadurioù evel strolloù (Gl. *groupes*) ma krogad da anavezout o doug er Ventoniezh. Sed degasadenn KLEIN. E vennoz diazez oa dezverkañ pep mentoniezh dre ur stroll treuzfurmadurioù, ur ventoniezh o vezañ neuze studi an anargemmadoù dre ar stroll treuzfurmadurioù-se. Diwar se e c'hallas rummañ ar ventoniezh vannadel (Gl. *géométrie projective*) ; stroll an treuzfurmadurioù *affines* a ampar un isstroll (Gl. *sous-groupe*) eus ar stroll bannadel o virout ar c'henroud (Gl. *colinéarité*) hag ar gensturiegzh, n'eo

ket ar regadoù hag ar c'horniadoù. Sl. ivez ar *mentoniezhoù mentel* (Gl. *géométries métriques*), KIS-485, La-10, pp. 316 hh.

Houmañ eo ar gudenn : penaos kendeç'heriañ Gl. *affine* ? Betek henn e raen gant Br. *kevnesael*, diwar Br. *nesaelezh* "proximité, affinité" ha Kb. *cyfnesaf* "next, nearest, bordering", *cyfnesafiaeth* "nearness, kinship". Evit an arloadur anvet Gl. *affinité* e raen gant Br. *kevnesaat*, (*kevnesâd*, *kevnesadur*). Bennozh d'an iwerzhoneg avat e kav din e'm eus dizoloet gwell diskoulm. Meneget 'm boa dit hIw. *coibnius* (< **co-ven-estu-*), "affinitas" ; kv. hIw. *fine*, hBr. *coguenou* (< **co-ven-*), La. *ue(nus)*. Petra soñjal eus Br. *keouenn*, Gl. *affine* ; Br. *keouennadur*, Gl. *affinité* ?

(YBAN da GE – 13 02 96)

Ar Ventoniezh a vez degaset er c'hentañ hag en eil derez dre studi teskadoù poentoù, anvet eeunennoù, plaenennoù, egor. An aksiomennoù darbennet evit an teskadoù-se a ampar un delvan jedoniell a zo treuztaol perzhioù alvezel 'zo. Diwar an damkaniezh savet en doare-se e tigejer an ergorenn jedoniell sturiadell ha da heul e respizer an egor sturiadel hag e luniadur. Dezren ha dezrann perzhioù an egorioù sturiadel a gevaraez, dre un astreñ war an teskadoù orin, o studiañ donoc'h. Anat e teu da vezañ neuze ez eo pinvidikoc'h ar c'heal a egor sturiadel eget pezh a veze rakweladus gant e orin mentoniell ha kalz pelloc'h ez a amgant e zedalvezadurioù eget studi an egor alvezel " boutin ".

Diwar luniadur an egor sturiadel e respizer ul luniadur kerentiet, hini un egor *keouenn ouzh an egor sturiadel* (Gl. *espace affine attaché —associé, relativement, par référence — à un espace vectoriel*) a reer poentoù eus e elfennoù. Da neuze, an teskadoù poentoù eus ar ventoniezh voutin zo *egorioù keouenn* dibarek (gouzispleg : ouzh un egor sturiadel roet).